

7 18
GW ERZ

EN ENOR

DA ZANT MATILIN-MONKONTOUR.

Mad da véan kanet war an ton gallek :
De Marie, qu'on publie..... Pe c'hoaz,
War an ton : *ô Marie, ô douce étoile.*

1.

O zant bras, zant madélézuz,
Nin a zeu deuz a bel bro,
Evit goulen bennoz Jézuz
Hag ho pennoz war eun dro.

DISKAN.

Da Vreiz-Izel
Roet skoazel,
Zant Matilin-Monkontour,
Ha diwallet
Deuz ar pec'het,
Nin a vo gant ho sikour.

2.

Evel hon zud koz Brêtoned
E karomp ar pardonio,
Ha d'ar zent hon gour vignonned
E kasomp hon fédenno.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

3.

En Breiz-Izel, ar gristenien
A blij d'hê bué ar zent ;
Ho pué rei d'imp sklèrijen,
Zant Matilin, en peb hent.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

4.

Er fals kréden oc'h bet ganet,
Mez abréd doujans Doué,
Dré ar vadeiant vinniget,
A lugernaz 'n hoc'h iné.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

5.

Da daouzek vla, bugel dister,
C'houi n'em ro d'ar binijen,
Ha noz dé, c'houi' béd hon zalver
Da rentan ho tud Kristen.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

6.

Ho mam *Euphémia* hanvet,
Oc'h anvéout ho furnez,
Héb dalé 'n em zantaz galvet
D'en em ober kristénez.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

7.

Ho tad *Marin*, en eun unvré,
Ho kwélaz, vel kabiten,
Laket gand an otro Doué
Evit rén ar gristenien.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

8.

Zouden 'ta ho daou a teujont
Da zentin ouz an envo,
A greiz-kalon a c'houlenjont
Dilêzel ho douéo.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

9.

Polykarp, an Eskob zantel,
A skuil an dour a vué
War ben ho tad, ho mam fidel,
C'heuz gonéet da Doué.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

40.

Ar mab éta a neuz ganet
Hé dad, hé vam d'ar gouir fé,
Muioc'h d'hé a neuz-han roet
'Vit névoa bet digant-hè.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

41.

Né oa 'r zant némed ugent vla
Mez hé furnez a oa braz,
Hag an Eskob gant kalz a joa
Bèlek Doué hen gréaz.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

42.

Pa brézégé d'ar baganet
Oa ken nerzuz he gomzo,
Ma c'houlent bean badéet
Liez gouéch a vandenno.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

43.

En pad eur véaj a réaz
Polykarp en Itali,
Gand holl furnez hen a rénaz,
En urz vad, an Eskopti.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

44.

Abréd a oé zant Matilin
Brudet dré hé vurzudo,
Chétu pérak, war an daoulin,
A poker d'hé rélégo.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

45.

Da Rom ar zant a oé galvet
En dro da veré'h eur roué,
Hag a tée'haz an drouk-spéret
Hi zrubiillé noz ha dé,

Diskan : Da Vreiz-Izel.

46.

Héd tri blavez hé vurzudo
A c'honeaz da Jezuz
Eun niver braz a inéo
Vo da viken evuruz.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

47.

Da beb den a nijé anken,
A oa digor he galon ;
War ar pec'her paour hé bédén
A rè disken ar pardon.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

48.

Karet nijé 'r bèlek zantel
Skuil hé oad évit ar fé,
Raksé en env man ken huel
Evel merzèrien Doué.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

49.

Zant Matilin, roét bréman.
D'ar vrétoned ho pennoz,
Gred ma c'héffomp holl da ganan
Gloar Doué d'ar baradoz.

Diskan : Da Vreiz-Izel.

IMPRIMATUR.

Brioci, die 15^à Maii 1874.

† AUGUSTINUS.

Propriété.